

11

Eur vech dilezet Doue
 Gant an dud dirollet,
 N'euz justiz, na liberte
 Na guir anavezet;
 Eur valken du ha tenval
 A zall ar sperejou;
 Digabest an techou fall
 Gant ho goall ioulou.

12

C'hoant a vije da vouga
 Ar Feiz en hor c'halon :
 Petra deufemp da veza
 Heb ar religion :
 An ourgouil, ar gassoni.
 Hag al lubrisite.
 Mesket gant laeronsi
 E peb leac'h a renn-fe.

13

Intron Varia Berven,
 O pet truez ouzomp !
 Kendalc'hit ar sklerijen,
 Ar Feiz a reketomp ;
 Bepred treac'h d'ar geier,
 Harpit Iliz ar Frans,
 Ennhoc'h hag en hor Zalver
 E ma hon esperans.

IMPRIMATUR :

A. GADON

Vicaire général

Corisopiti, die 26 Julii 1907

KANTIK**Pelerinet Intron-Varia Berven**

Ton : «Kantik Breuriez ar Feiz»

Diskan

*Intron Varia Berven
 Guechall ken erbedet,
 E kreiz an den valijen
 En hon amzer fuillet,
 Ni a zired d'bo chapel,
 Evel hon tudou koz ;
 Eno, e kavimp skoazel,
 Sklerijen ha bennoz.*

1

Tour Berven var an huel
 A veler a bell bro,
 En despét da beb avel
 Divrall e chom atao ;
 Plijadur ha levenez
 A ra d'hor c'halonou
 Delc'her sonj euz madelez
 Rouanez an Envou.

2

Ar vein ker brao kizellet,
 An tour gant he volziou,
 Ar c'hoat dispar labouret
 En dro d'an Aoteriou
 A Lavar da beb hini
 Ar grassou talvoudek
 Skuillet puill gant dourn Mari
 Var hon tud kalounek.



3

N'euz ket e Breiz eur c'harter
 'Ve stankoc'h chapeliou
 Sayet da Vam hor Zalver
 Egèt en hor meziou;
 Kreisker eo ar vrudeta,
 Lambader, Kerelon.
 Prat-Coulm, Berven ar gossa
 Euz bro gorre Leon.

4

Ar park a zo e kichen
 Ar vered tro var dro
 'Zo hanvet park an derven,
 Setu ar guir hano.
 Eur vezen zero kleuzet
 A lojas da genta
 Skeuden ar Vam benniget
 En amzeriou pella.

5

Euz eur c'hanved d'egile
 E ye var gresk ar brud,
 D'ar Japel e tirede
 Eun niver braz a dud;
 Lod 'vit goulenn ar pare,
 Lod all, an nerz kalon;
 Oll laouen a ziztroe
 Gant iec'hed pe bardon.

6

Mam Doue ne skuiz morse,
 Da heul Jezuz he Mab,
 O skuill var he bugale
 Grassou euz an dibab;
 Ni 'zo bugale Mari.
 Evel hon tadou koz.
 Kristenien karet ganthi.
 Galvet d'ar Baradoz.

7

Iliz Berven ker brudet
 A zo bet a vizkoaz
 Chapel Mari glac'haret,
 En he zav 'tal ar groaz;
 Glac'har ar Vam druezus
 A zo eur rann galon;
 Assanti 'ra gant Jezuz
 Da c'hounid ar Pardon.

8

Ar Mab, ar Vam unanet
 Er memez sacrific
 Gant Doue 'zo silaouet;
 Torret nerz he justiz:
 Tarzet deiz an drugarez.
 Deiz ar vuez gristen:
 Bennoz eta d'ar Verc'hez
 'Vel d'ar verelaouen.

9

Lakeat er bed Mab Doue
 En eur c'hraou dirapar,
 Kemer 'ra da vugale
 Ni oll var ar C'halvar;
 Mari 'zo 'ta Mam Doue,
 Hag hor Mam benniget,
 Eur Vam n'abandon morse
 He bugel goall doaniet.

10

Hirio eo kriz ar brezel
 A rer d'ar gristenien:
 Kaseat an Iliz zantel,
 Ar Pab, an Eskibien;
 Lammet imaj hor Zalver
 Euz an hospitaliou;
 Ar skoliou' zo dibater,
 Dizoue al lezennou.